

Chanson
an Intañon deguiset.

(510, suite)

Var ton : Un Escop eus a Franz.

Intañvien ar c'hanton, deut da zelaou cana
Ho portret veritabl e zân d'ober bremâ ;
Ho puez pen-da-ben a lajin var baper :
Er quelet a reot var ben nebeut amzer.

Ma n'o zennân get oll, em bo an nombr brassa ;
He a bed ar re all na devint get da facha.
Ne larin netra tout nemet ar virionez ;
Ne c'houlennân nemet-o da destou em c'hostez.

Ar c'hreg en he quele, en artiel ar maro,
A c'halvo d'e c'haret he oll bugaligoù,
Da lavarret dezô oboissa d'o zad,
Senti outân en oll evel bugale vad.

(511)

Neuze dre e hano, e c'halvo he fried,
Gent equet finissa, da zonet d'e c'haret,
Da lavarret dezân an adieu diverza,
O verza var ar poent da quitât ar bed-mâ.

Adieu stâ, va fried, êchu eo va bue :
M'o ped, lagit eves, c'houi chomo va goude ;
Demeus va bugale bezit soignus bepret :
Mar demerit davantach, gaoù outo a refot.

Avancet oc'h en vad, hor bugale zo bras ;
Ma ouffen e temezac'h em be ur chagrin vras.
Ho merc'h a zo capabl dija d'am remplaci,
Hez casut serricherien da zonet d'o libri.

Mar continu ar vreg da zont d'en exporti,

(512) E tou dezi biqen na dei da zemezi,
En devoe eviti calz eus a amitie,
Da zonzjal e vancje d'ar pez a c'houlenje.

Goude gementse oll, dre furi ar c'hleñvet,
An nery a vang d'ar vreg, na lavar quer ebet:
Antren ra e transport e creiz he fassion,
Cui, quel ha lamanti ha dezolation.

Neuze eo e velet oc'h en em dransporti,
Cazi o fatica. Penos en arvêti?
En em stinca a ra dre oll var ar peziou;
Ne zeus remed ebet d'e hirvoud, d'e gannou.

Sailla ra an intaon var quele e bried,
Poqet a ra dezi, e galon glac'haret.
D'e hirvoud, d'e gannou na glasqit get remed:
Coll en devoes oll en eur goll e bried.

(513) Clasq a r'er ul lincel da zont d'he liana;
Poqat ra c'hoas dezi eus ar galon c'hoecca;
An archet pa zeo grêt a deu da ambrassi;
Ranna ra e galon oc'h e gonsideri.

Pa zorti an archet evit mont d'an douar,
E cressq c'hoas e hirvoud, ec'h ogmant e c'hlac'har.
Pa zisqen an arched ebars e fong ar bez,
Ret eo e arvêti, p'en em stinco ivez.

Pa vel telti douar var arched e bried,
E varv en un instant, ma na vez get fellêt.
Credi a ra an oll en defe bolontez
Da veza entèrret ganti er memes bez.

Bec'h vezo d'an eizvet beza peur-êchuet,
Na veler an intaon o sellet ar mere'het.
Ne rai get (mar qirit) evit dirac an dud,
Nep seunt seblant anê, gant aon na zafe brut.

(514) Commanç a ra dija cazi en em avang,
Da laret eo yaouanc ha da gomz e cadang.

364

Mar en devoa cant scoët, pa varvas e bried,
Pempzec cant en devo neuze, mar be credet.

Yaouancis en e beun a zo renouvelet,
E mesq an dud yaouanc eo en em-guev bepret;
Evel pi'en defe c'hoant da brofita ganto,
E bër amzer esp habilloc'h equeto.

Prestic neuze 'r quelot o commanç canjoli,
O poqet d'ar merc'het, hep c'hoant da zemezi.
A laro: mes petra? n'en devo nep mignon,
Nemet nep a gomzo en dezir e galon.

Ne vang netra pelloc'h d'an intaon possedet,
Nemet sujet dister evit beza demezet;
Ma na gav ur sujet ec'h invanto unan,
Erit gementse oll ne vo qet pell e poan.

Va bugale zo cris, ha n'em estimont qet;
Pa vezan-me en ty, na leront quer ebet:
Drouc-comz eus ac'hanon, ha cranchat oc'h va fui.
Ne meus moyen ebet da chom hep demezi.

(515)

Mar dispignàn guennec, e vo torret va fenn-
Egant comzou arrogant ha langach disqempen:
Ne meus quer da laret, int a deu da gommandi,
Oboissa a ranqan, pe dont da zemezi.

Trêtet en esclavour, ne meus mann da laret;
Pa èruan er quër, bec'h vez din caret boued.
En em liqit em plaç, ha sonjit gouscoude,
Ha c'houi vez a humor da reva er quis-se?

Cetu 'r rêsoniou caer, bremàn c'hell pourmeni,
Canjoli ar merc'het hac o darempredi.
Caret en deus sujet, er gout a rit bremâ:
En etat ma medi n'oufe bigen beva.

D'en em justifia ne vang james excus;
Mad pe fall a gavo an neb zo cabllus;
Mes, allas! ar bed oll a zo persuadet

(516)

Gement a lavar tout a zo drouc invantet.

Sc'bet eo en e benn, ne zeus get a remed,
Re vras eo e glénvet evit beza quellet;
Ret vezo d'an intaon certen c'aret ur plac'h,
Pe birriqen james e galon na vo yac'h.

Goelet oc'h eus - en oll gant ur varv negliget;
D'eo diou vech er zizun bremâ e vez razet.
Epad ur mis, quechal, na gribe get e benn,
Bremâ evel ma sao e renk en em quempen.

Quechal en er quelac'h o sellet e voutou,
Mes bremâ er quelit o sellet an astrou,
Savet gantân e benn, er gout a rit asialc'h;
Gent e cafe un neiz equet un houarn marc'h.

(517) Gervat a ra mibin hac en em ditira,
Fichet eo e zillad eus an excellanta,
Gantân un tourdecou hac ur boutou hardet,
Erit, en assemble, ma plijo d'ar merc'het.

Evel ur stereden, e lagat zo brillant,
E bostur degajet, hac e vitach ardant;
Chenchet eo en antier, n'en anavezzer mui;
Mervel a renco prest, pe dont da zemerji.

Tobolec e gerze, gent ma varvas e vreg,
E benn en e vruchet, cazi en e zaoù blec;
Avanç a ra bremâ, ha doubla e basiou,
Reud vel an tad Jacques, pa za d'ar marc'hajou.

Ne chomfe get er quër, pa vez torret e benn,
Partout e renk monet evit heuill ar vanden;
Gent n'oa get touellet gant an assembleon,
Bremâ nemet eno james n'en em blijo.

(518) Vanti rai e venach, comz demeus e arc'hant,
E zeo un den robust hac un den excellent;
E c'hreg a vo eurus gantân, mar bez credet,
E zorn a daillo dei, ne vo james genet.

306

Calz a lar din oun gris, emeus collet va dent,
 E zeo ridet va faç. M'o c'hafen var va hent,
 M'em be ar blijadur da zisqi dē beva:
 Biscoas ne voen goell pot eguet ma zòn bremâ.

Dre amâ, ententit, eo e rang caout ur plac'h,
 Ne devo, da hirra nemet un trivac'h vloas;
 Auc'hpen: gant yaouanqis, coantis à c'houlennno,
 Tout e fell d'al louz cos o c'haout gant ar madou.

Demezet eo an intam, ha rentet eo contant,
 Da ur plac'h yaouanc-flam, hac ouzpen e zeo coant;
 Bet en deus e zezir, ne c'houlen davantach;
 Pareet eo e c'houlit, ha bremâ e zeo yac'h.

Fin an Eil Tom.

(Vol. II, p. 510-518.)
 34 str. numérotées.